

### Leur newe Crec'h Morvan ou Louis IX.

– Leret tu din, ma moëreb kos,  
Pellac'h man e ebato fenos ?

– El leur newe en Crech-Morvan  
ha nozvez vo ive goude coan. –

– hastomp nin nean hon c'hudenno  
ma c'heffomp en ber dan ebatou.

- ma merc'hek coant, nan na nefet ket  
d'al leur newe se mar ma c'hredet.

Eno e vo tud gentil yaouank  
deut ewit iedall ar merc'het coant.

Otro Rosko, otro Mezobran  
hag an tri c'hadet a Crec'h morvan.

– Bed drouk gant a nep a garo  
fenos dal leur newe niñ ielo

Mar be sonerien niñ a danzo  
ha ma na veket niñ a gano.

Otro Mezobran a levere  
al leur newe an nos se :

– Brawan plach laka troad war douar  
E Janet Derrien a Grec'hglujar.

– A pa ve koantoc'h eun anter,  
na ne ket dide c'hoar vager ?

– O pa ve c'hoar naturel dime  
m'he c'harfe ganeñ en eur goële.

Janet Derrien a levere  
de danzer yaouank en de se.

– Erwan Guillo, leres te d'in me,  
mar me eom te em jichourfe.

– ha pa glefent kol ma bue  
Janedik coant m'ho chichourfe.

danzomp, dansomp, greomp ar bal  
ha lesomp kos da c'hrignousal.

Erwan Guillo a levere  
dre vreur c'henan war an heur se :

– a man vo trous breman souden,  
Breur out d'in me wit ma souten ?

– Me so breur did, m'es soutenno,  
a pa renkfen souf ar maro.

Danzomp, danzomp, greomp ar bal  
ha lezomp kos da chrignouzal.

Sevel ra brum, arri e tewal  
bremer c'her da dansal der sal

med an dud yauank ne deuint ket  
a Balamour dan dimezellet

abalamour d'hon dimesellet  
na c'houllont ket er Baysanted

Cadet Crec'h Morvan e lere  
d'he soner dal er sal neuse :

– Sones te brao, ma soner dal,  
wit m'allo hon merc'het dansal. –

Cadet Crec'h morvan e lere  
d'an dudgentil er sal neuse :

– Greomp hon choas gant er golo ;  
pa vo krog an danç m'ho lac'ho.

– Otro Mezobran ma breur mager  
List ac'hanon da vont der ger.

gred ma c'hin me divlam der ger  
pe war ma le hen pefet ker.

Ha Mezobran a responte  
da Janedik vel m'he clewe :

– Merc'hek yauank me ho tisko  
da dont an nos dan ebato

da dont an nos da Grec'h Morvan  
da dansal er sal goude coan.

– ma breur mager, les a'non me  
pe a kousto dide da vue.

– Na gousto ket din ma bue,  
na dide na rei'ket ive,

ha pa spe eur bastardek bian  
wit caout sonj deus a Grec'h Morvan.

Wa ket er gir perlavaret  
Janet eur c'huistel neus tennet,

eur c'huistellek a olifant gwen :  
ha da c'huistellad a boëç he fen.

Vel ma neus ar c'huistel clewet  
Erwan Guillo so dilampet.

Erwan Guillo hag he vreur bras  
barz er sal vras gant peb a vas

– Forç ma enor, me ar merc'hed !  
Tann a kurrun ! me ar botred.

Ma na meus ket aman c'holo  
breman souden m'e allumo. –

Wa ket he c'hir perachuet  
en tan er c'hastel so kroget.

Kri vije ar galon ma welje  
en tal Crec'h Morvan an nose.

O welet an tables o ruiän  
gant goad an noblanc o scuillan  
Erwanek Guillo eus o lac'han

Erwanek hag he vreur c'henan  
gant peb avas eus ho lac'han

Erwanek Guillo a lere  
En Kerglujar pa narie

– Bonjour a joa bars an ti man  
Chetu ari ho taer merch aman.

Chetu aman ho merched yauank  
Mes aoun e kollet ho squiant.

Chetu int aman en toul ho tor  
na neus kollet hini he c'henor

he c'henor hini na neus kollet ;  
he squiant vad na laran ket.

Potret Guillo a levere  
Er ger parient an noz se

– Dipet dimp peb a c'hancane  
ma c'heffomp hon daou da vale.

Dek dengentil a meump lac'het  
chom er vroman na nellomp ket.

Nin a ia vremen da baris  
da gav ar roue da c'houl justic

Bonjour a joa er pales man  
Er roue Louis pellach a man ?

Roue Louis deudhomp do kat  
abalamour meump skuillet goad

goad tud gentil en newa c'hoant  
da violin merchet yauanck.

laket meump an tan n'ho zi braz  
ha lac'het ane a dolio baz.

A(r) roue kos dindan he dao  
a c'hoarse clewet potred Guillo.

— Daou den kaer och ha ma c'heret  
en toéz ma goerdo a chomfet.

Sort dach hu a vank diñ tri mil  
d'ober bresel dan dud gentil.

me skruivo dach gant cachet gwen  
m'ellfet bale en peb tachen

me skruivo dac'h gant cachet glas  
m'ellfet bale gant ho pen bas.

ha ma fell da den ho c'haretin  
goude se nevo affer ouzin.

*écriture de Kerambrun.*